



CANTIC

396

245 2/

SANTEZ ANNA.

F

*Var un ton nevez.*

ME ho supli, tud devot, da zelaou a galon  
Ur C'hantic spirituel gant guir devotion,  
Azo grêt e gloar Doue hac e Vam ar Verc'hes,  
D'an Itron Santez Anna, hor guir Avocades.

Mes, qent avanç davantach, goulennomp  
ouz Doue

ur zicour, an asistanç, sclêrijen eus an ên,  
Dre intercession ar Verc'hes hac ar Speret-  
Santel,

Da gomposi ur C'hantic da gana e Breiz-Izel.

Me gomz a ur plaç santel hac ancien meurbet,  
reqantet a bep contre gant an dud afflijet,  
Leon hac a Dreguer, a Guerne, a Venet,

A bêvar c'horra ar brovinç e teu pelerinet.

Dezir amets , Bretonet , da zisclêriâ brema

Ar miraclou admirabl a ra Santez Anna :

En escopti a Venet , a dostic da Alre ,

Ema'n tenzor precius d'or c'horf ha d'on ene.

Janned ar Bescond hanvet , a escopti Guenet ,

E spaç demeus a zeis bloas privet eus ar c'herzet ,

En em gouestas gant lizianç dre guir devotion ,

Da vont da Zantez Anna eus a greis he c'halon.

Casset voe en ul letier gant daou zen assistet ,

Rentet e Santez Anna , pa e d'oa deziret ;

Evel ma yas en Ilis dirac Santez Anna ,

E quitas he branellou , ma savas en he za.

Divale a ras d'ar guêr hep den d'e assista ,

E branellou a lêzas direc Santez Anna :

E maint c'hoas en Ilis d'ar bed oll da velet :

Meulet ra vezo Jesus hac e Vam beniguet.

Mac'harit Hostiou ive , a guichen Qimperle ,

Zobet pel bras languissant chomet var ar gueles

Mes he zad a brometas eviti un novet

En Ilis Santez Anna m'e divize yec'het.

Var ben daou zezvez goude ar plac'h-mâ a savas

Admirompol , christenien , ur miraclso qer bras

En deus grêt Santez Anna e quichen Qimperle

En andret eur plac'h yaouanq he fede nos ha de

A Vres eur zoudard devot , e hano St.-Amant

O tremen bars en ur c'hoad en em gavas gant

Pèvar forban debordet en hent bras o laères,  
 Hac a c'houlennas outàn e yalc'h pe e vuez.

Ar zoudard, pa o c'hlêvas, a lavaras dezo :  
 Me a zo un tremeniat, n'em eus qet a vadou,  
 Hac a ya da bardoua da Escopti Guenet,  
 Mar bê madelez Jesus va lezel e yec'het.

Ar mestr eus ar volèrien a zistroas ountâ :  
 Gant ur vistolen garguet, en esper e laza ;  
 Evel ma sonjas tenna, e vrec'h outâ zounas,  
 Ar vistolen eus e zorn d'an douar a goezas.

An tri laër all pa veljont oa brec'h o mestr  
 sonnet  
 A c'houlennas ous ar zoudard hac en doa-y  
 sorcet :

Salocroas sur, emezàn, me ne dòn qet sorcer,  
 Jesus ha Santez Anna am prezerv dious maler.

Eus a guichen Rosternen ur melineryaouanq,  
 Pa oa o lemma ar velin e torras ar palanq,  
 Ma chommas etre daou ven, ma sonjet oa lazet ;  
 An Itron Santez Anna en deus-àn prezervet.

Dious ar mintin pa zave ha pa zê da gousqet,  
 E pede Santez Anna gant ur galon barfet,  
 D'e brezervi dious maleur ha goal-chañç er  
 bed-mâ ;

Choazet en devoa da vam Itron Santez Anna.

Mari ar Peusiou hanvet, eus ar guêr a Alre,  
 E spaç eus a c'houec'h devez e poan a vugale,

Gant e fried oue gouestet dirac Santez Anna,  
Neuse souden e c'hanas eus Mab ar vaillanta.

Hac urvaguerez yaouanq avague urc'hrouadur,  
Da ur bourc'his a Naonet, comprenit ar maleur,  
Un devez e sortias, allas ! ne zonje qet,  
Ma lêzas ar c'hrouadur en e gavel cousqet.

O pebes tristediguez, glac'har, spont hac  
horrol !

Pa zistroas ar vaguerez da zigueri he dor,  
Pa zellas ous ar c'havel, ar c'hrouadur ennàn,  
Contamet gant ur penmoc'h an anter anazàn !

Hac hi comañç da grial : Itron Santez Anna,  
Petra meus-me da ober ? manqout a ràn simpla ;  
Allas ! me a vel patant e vezin punisset,  
Abalamour d'ar c'hrouadur a zo ganén maguet.

Ar bourc'his qenta a glêvas, a laqas e  
c'hemeret,

Rentet er memes amzer er prison a Naonet,  
Souden e oue grêt e froces da veza punisset ;  
An Itron Santez Anna e deus hi preservet.

Lennet e oue dirazi gant rigol he setañç,  
Cunduet gant ar bourreo da guichen ar potañç,  
Ha pignet e oue gantàn bete'r vas huella :  
Eno ec'h aparissas neuse Santez Anna.

Courach, emezi, va merc'h, n'o pezo droue  
ebet,  
Ar c'hrouadur a zo yac'h en e gavel cousqet ;

Me a zo Santez Anna , ho cuir Avocades ,  
Aboe an oad a zeiz bloaz em pedac'h alies.

Ar bourc'his genta ma clêvas oa e vab res-  
suscitet ,

A gomanças da grial evel un den follet ,  
En em stringas d'an douar evit goulen pardon  
Ous Doue ha Santez Anna eus a greis e galon.

Me ê an den miserabl ha ne veritàn qet  
Beza amâ en ho prezanç d'an daoulin prosternet ;  
Me ray amand enorabl e plaç ar vagueres ,  
Hac a choulenno pardon eus va fallagriez.

Ar bourc'his a yas neuze da dy un ofreber ,  
Laqat ober en arc'hant fêçon ur c'hrouadur ,  
Evit digas en ofranç da Ilis Santez Anna ,  
A veler c'hoas en tensor bete'n heur a vremâ.

Ha Catelar Brishanveteus arguêra Henbond ,  
A goezas bars er rivier , ma yas dindan ar pont ,  
Gant an dour e oe ruillet , ma oe-y dindanna  
Nao pe zeg heur horolach abars dont aneza.

He mab genta ma clêvas oa e vam en coezet ,  
D'an Itron Santez Anna gantàn e voe goestet ,  
Demeus a , drêgont diner , oferen ha novet .  
Ha dre c'hraç Santez Anna ne devoe drouc ebet.

Ur vatimant mrrc'hadour o tistrêy a Vourdel ,  
Qemeret dre ur bar tourmant tolet var ur rohel ,  
Hac a voe entren daou dour ar spaç a dri<sup>o</sup> devez ,  
Ma sonje'r vartolodet e coljent o buez.

Ar c'habiten fatiguet hac ar vartolodet ,  
 Resolvet oll da vervel eus a greis o yec'het ,  
 En em stringjont d'an daoulin da grial , da  
 ouela ,

Ous en em recomandi d'or mam Santez Anna.

Abars ur c'hardeur goude ober o orèson  
 D'an Itron Santez Anna eus a greis o c'halon ,  
 Ar môr ous en em zével , al lestr a voe rentet  
 Dre ur miracl ar c'haera e rivier an Naonet.

Eur vatimant perisset ebars creis ar môr don,  
 An equipach oll beuzet , exceptet ar patron ,  
 Peini var ur planqen a chomas seiz devez ;  
 Mes dre c'hraç Santez Anna e sovetas e vuez.

Da Ilis Santez Anna e roas en presant  
 Ar som demeus a vil scoet , ur galonen arc'hant,  
 Hac ouspen ze un dablen guernisset eus a our ,  
 Ha pêvar guennec varnugenta roas da beppaour.

Incapabl on, christenien, da zisclêria brêmâ  
 An nombr bras a viraclou a ra Santez Anna ,  
 Var ar môr, var an douar, e qement m'e feder,  
 Supplia a ra Jesus da bardoni d'ar pec'her.

Santez Anna ro certen ar guelet d'ar re dall,  
 Ha d'ar re vud ar parlant, clêvet d'ar re vouzar,  
 Remed d'an dud afflijet, d'ar re gam ar c'herzet,  
 Soulaj d'ar vugaligou, ha d'an dud clàn yec'het.

Amâ emâ ar feunteun eus a c'hraçon Doue,  
 A recur yec'het d'ar c'horf ha buez d'an ene,

O tont da gôves enni ha da gomunia  
D'an deziou a zo choaset evit e bisita.

Bep meurs qenta eus ar mis e caner an ofiç,  
En Ilis Santez Anna, ouspen ar sacriç,  
Evit conservation an oll belerinet,  
A zeu da Zantez Anna gant ur galon barfet.

Ar c'huec'hvet deiz varnuguent demeus a  
vis guere  
Emàn gouel Santez Anna hac ar solanite ;  
Gant ar Pab ez eus-enni en deiz-se acordet  
Induljançou plenier, remission d'ar pec'het.

Piou benac a gôvessai hac a gomunio  
En Ilis Santez Anna, en deiz-se a c'honeo  
Pemp cant devez a bardon, o tont da lavaret  
Pemp *Pater* ha pemp *Ave*, recita ur chapelet.

O Itron Santez Anna! ni o supli hac o ped,  
Pedit evidomp Jesus en palez an Drindet,  
Evit, goude hor maro, ma zaimp oll da repos,  
Gant ar zent hac an æle e gloar ar barados.



*Pedenneu hac Orêsonou a dle ar Gristenien da  
lavarat, pere a zoug devotion da Zantez Anna.*

**O**pezit sonj, Santez Anna, Mam a gonsolation,  
penos ne voe clêvet biscoas den o lavaret e  
vije bet dilêzet na refuset, mar teuje en afflic-  
tionou doc'h invoqi ha d'o pedi, ar galon tou-

chant ha penitant en deveuṣ bet recours d'èc'h,  
 hac en eus goulennet oc'h asistanç. Ho peden-  
 nou a deu da vea exocet gant hor Zalver J. C. ;  
 racse e qemeromp esperanç ennoc'h evel a ra  
 an dud clàn pere a deu d'o pisita. Ni en em a-  
 dres deoc'h eus a greis hor c'halonou , hac ho  
 reclamomp humblamant. Accordit deomp ar  
 c'hraç da allout eur vech jouissa eus ar gloar  
 eternal. *Amen.*

*Qement guech ma leverfot an Orèson zo amd  
 varlerc'h, e c'honofot trêgont mil bloas a bardon  
 accordet gant ar Pab Alexandr da guement  
 Christen zo er bed.*

**A**VE, gratia plena, Dominus tecum; tua gratia  
 sit mecum: benedicta tu in mulieribus, et be-  
 nedicta sit Sancta Anna, Mater tua, ex quâ sine  
 maculâ et peccato processisti, Virgo Maria: ex te  
 autem est natus Jesus-Christus, Filius Dei vivi. A.

F I N.

---

E Montroulez, e ti LÉDAN, Impr.-Libr.